

Yann-Vari Perrot (1877-1943).

Beleg. Rener “Feiz ha Breiz” hag ar “Bleun-Brug”. Kredi a ree e veze liammet ar relijion gatolik gand ar brezoneg.

Drouglazet e oa bet e 1943 pa oa bet embannet en e gelaouenn e oa bet greet lazerez Katyn gand ar Zovieded. Ha, diouz ar pezh a greder, ne oa ket bet savet ar pennad gantañ !

Yann-Vari Perrot

Dizro an Dianket

C'hoarierien

An Aotrou Kerioled

An Aotrou Garo

An Tad Mikêl

Koueriaded,

Bourhizien,

Peorien, Gwerzerien gwerziou, Bugale.

An traou a dremen da zeiz pardon Intron Varia Druez e Pluvigner e 1634.

Diviz I

Ar Bardonerien, *er chapel*

Ni ho salud gand karantez,
Rouanez ar Zent hag an Êlez,
C'hwi a zo benniget
O Pia !

Hag a hrasou karget
Ave Maria.

Eur gwerzer gwerziou *war an teatr.*

Ar poz kenta, kanet gand ar gwerzer e-unan

En amzer goz on Arvor
A oa teñval-maro,
Satan en-doa e gador
E skeud ar gwez dero
An Arvoriz a rene
Dre an deñvalijen,
Pe tra dezo 'oa Doue
Nemed Doue hepken !

Daou grouadur dezañ o tiskana outañ.

Intron Varia Druez
Patronez ar vro-mañ
Bezit hizio 'n on touez
O selaou peb unan.
Goulennit digand Jezuz

A vezo or barner
Ma vezo trugarezuz
D'ar Varn en or heñver.

O-zri, goude beza gwerzet eun nebeud ez eont kuit en eur gana.

Eur paour-kêz

(gand flahou)

Truez en an' Doue, ouz ar hêz mahagnet,
Ne hell mui labourad, da hounid e voued.

Eun all

Eur gwennegig d'an hini a zo war e wele,
Eiz vloaz 'vo da ouel Yann, ma ne hell ket bale.

Unan dall

Truez ouz ar hêz dall, en 'an Doue, tud vad.

Eur paour all c'hoaz

N'am-eus ket mui, na breur, na c'hoar, na mamm, na tad.

An den dall da unan madelezuz

Trugarez .

Eun all

Bennoz Doue.

Ar gwerzer gwerziou

Prenit ar werz nevez
'Zo savet er bloaz-mañ en enor d'ar Werhez.

Intron Varia Druéz
Patronez ar vro-mañ,
Bezit hizio 'n on touez
O selaou peb unan.
Goulennit digand Jezuz
A vezo or barner,
Ma vezo trugarezuz
D'ar Varn en or heñver.

Eur bourhiz

Pegement eo ganez ?

Ar gwerzer gwerziou

Eun diner.

Ar bourhiz

Del !

Eur paour

(War eun ton truezuz)

Eun dra

Bennag **d'ar paour** kêz koz da gaoud eun tamm bara

Fenoz !

An Aotrou Garo

d'an Tad Mikêl

A ! Tad Mikêl ! na pebez pardon kaer ;

Ar feiz n'eo ket eet c'hoaz euz bro ar brugeier ;

Ar Werhez 'zo karet, ha pedet eo ivez
Hag eur mor a Vreiziz a leugn hizio he lez.

An Tad Mikêl

'Hed an noz 'pad astenn, oan em hador goves.

An Aotrou Garo

Mall braz oa deoh neuze, lakaad ho penn er mêz ; Skuiz e tlefeh
beza !

An Tad Mikêl

N'on ket re !

An Aotrou Garo

Pa vezer
En em gavet en oad ho-peus, eo mad teuler
Evez ! mond goustatoh, diwall da dapoud glaz
O kemered semmen n'out mui diouz an diskoaz.

An Tad

Ba ! Doue' ro grasou d'an neb zo en ezomm,
Da beb den diouz e stad e vez roet e zomm.

An Aotrou Garo

Bet ho-peus ho lodenn ; arabad 'velato
Daoust d'ar pezh ho-peus bet, klask ober re ganto.

An Tad

(O vond kuit)

N'o-pezet aon ebed.

Eur paour

(D'an Aotrou Garo).

En 'an Doue, Aotrou,
Ho-pet truez ouzin.

Eun all

Gwelit va goulou.

*An Aotrou Garo a ro d'ar beorien eur gwennegig bennag.
Bugale a deu da bokad da zaouarn an Tad Mikêl.*

An Tad

a venniga anezo.

Ra vezoh benniget gand ar Werhez ho mamm.

Ar beorien

d'an Aotrou Garo

Doue r'ho paeo mad.

Eun den dall

Ma n'eo ket eun estlamm

Gweled stad eun den paour hag a zo ganet dall ;

Eun dra roet dezañ, a dalv 'vid ar bed all.

Eur bourhiz

da eur paour

Goude ar gousperou, diskabell, diarhenn

C'hwi raio evidon, teir gwech tro ar feuntenn.

An Tad Mikêl

Sellit'ta ! pa zoñjan ! ha n'ho-peus ket klevet
Ar vrud a zo amañ dre oll en em skignet
Eo ho paour-kêz kenvreur e Parlamant Roazon
An Aotrou Kerioled,

An Aotrou Garo

Va henderv e gwirion.

An Tad

Flipet euz ar gouent, hag eo en em roet
Gwasoh eged biskoaz d'an droug ha d'ar pehed.

An Aotrou Garo

O ! n'on ket souezet ! Ar bleiz d'e neiz atao
En-dra m'hello bale, er hoad a zizroio.
Ar helou-ze zo koz, rag abaoe diziou¹
N'eus meneg gand an oll nemed euz e droiou.

An Tad Mikêl

Ne ran nemed kleved ! **Ar** heleier din-me
Ne deuont ket war nij, rankoud a reont bale.

An Aotrou Garo

M'em-boa lavaret deoh n'eo ket gand dour merglet
E vez gellet ober gwin, mad ha brao livet.

¹ diziou : diriaou.

An Tad

Petra rit euz Kana hag euz ar burzud braz
A reas eno Jezuz, e gwin dour pa droas.

An Aotrou Garo

An dour troet e gwin a oa sklêr, hag hemañ
'Zo strafuillet kement e galon gand Satan
Ma n'he glanay biken.

An Tad

E zizro ouz Doue
A zeblante beza gwirion !

An Aotrou Garo

A zeblante.

An Tad

Anavezet am-eus e vamm : eur zantez 'oa.

An Aotrou Garo

A ! ya !

An Tad

He gweled a ran c'hoaz — He rozera
Ganti, a veze dibuneñ gand evezted
He Euriou oa en he dorn, war ar mên daoulinet
En he chapel, he gwelan, o pedi Doue
Da ober eur beleg euz he mabig.

An Aotrou Garo

Huñvre !

An Tad

Ya ! Huñvre, **mar** kirit, mez huñvre hag a ra
Kement mamm zo e Breiz.

Eur bourhiz

D'eur gwerzer goulou.
Del ! laka benniga
Ar piled-se, ha kas anezañ goude-ze
War aoter ar Werhez !

An Tad

Evidoh marteze ?

Ar bourhiz

Nann, evid eur mab din, hag he-deus bet pareet ,
Eo e roan hizio, va frov ha va filed.

Eun tad koz

Ha me va zad a deu, evid va merh-vihan,
Eur verhig c'hwezeg vloaz, 'zo chomet he-unan Ganen euz a zilerh
an oll vugaligou
A roas Doue din. E-pad ar gounidou
Er goañv tremen, eur pardaez, eh en em daolas
En he gwele, euz ar park dal ma tizroas
« Tad koz, emezi, riu am-eus, ha krena 'ran,
Evel va mamm, pa hourvezas, er gwele-mañ

'Vid ar wech diveza ; 'm-eus aon emañ tapet
Gand an derzienn. » — Ar paour-kêz merhig !
Lavaret
He-doa ar wirionez. — Terzienn a oa ganti ;
Drouglivetoh bemdez, he gweled o teuzi
Tamm-ha-tamm ; ha netra ne helle diarbenn
Ar hleñved he hrigne. — Hi a oa dianken
O weled ar maro ouz he diskar er bez,
Hag a blege he fenn, d'ar falher didruez.
N'am-boa ket va-unan, fiziañs ebed en oll
D'he gweled o tizrei, pa deuas en eun taol
Da zeiz kenta miz mae, eur wellaenn warnezi :
He daoulagad teñval, 'n em lakeas da skedi
O para gand dousder, war skeudenn ar Werhez
Bet digand va zud-koz hag am-boa greet bemdez,
E-pad nao deiz diouz reñk, eur bedenn dirazi :
Pare oa va faotrez, hag ar Werhez Vari,
Her gouzoud mad a ran, eo he-deus he fareet
Ha d'he zrugarekaad e teuan 'vel m'eo dleet.

(Mond a ra er chapel).

Eun den yaouank

Pa jomis va-unan, ha me yaouankig flamm,
Am-eus he hemeret evid beza va mamm,
Hag abaoe bemdez, me an emzivad paour,
Am-eus kavet bara, eürusted ha labour.

Eur martolod

E vab, eul lestr gantañ

Hi eo he-deus miret ahanon diouz peñse,
P'eo bet broustet er mor al lestr am dougenne ;
Ar re a oa ganen, oll ez int bet beuzet :
Pedet am-eus Mari, hag on bet selaouet :
Mil meuleudi dezi.

Ar bobl

Meuleudi d'ar Werhez.

An Tad Mikêl

Mamm an aotrou Doue 'zo braz he madelez.
Piou a oar, marteze e teuio da zelaou
Ivez ar wreg santel, a bede gand daelou
An Aotrou da ober, euz he mab, eur beleg ?

An Aotrou Garo

Arsa ! C'hwi a gred c'hoaz, e tougo eun truilleg
Evel m'eo Kerioted kalir an oferenn,
Kerkoulz 'vefe gwiska d'an diaoul eur zoudanenn.

An Tad Mikêl

Braz eo galloud Mari, ha braz he zrugarez
Klevit nag eo pedet ha meulet heb paouez ;
Gallouduz eo he homz, hag he halon tener
Ha den ebed biskoaz n'he fedas en aner.

(O kas an Aotrou Garo er chapel).

Deom en he lez, Aotrou, da bedi anezi
Zoken 'vid ar peher, dallet en e fazi.

Ar bobl

(er chapel).

War an ton : Allaz ne oufe den kompren.

Evid ma teurvezo eun deiz,
Gand an Aotrou Krist Or Zalver,
Diwar leton flour an hent kleiz
Lakaad da zizrei ar peher.

War an daoulin, en ho tachenn,
Mari, selaouit or pedenn
Mari, selaouit or pedenn.

Ar beorien

(War an teatr).

Evid ar paour a rank bemdez,
A zor da zor mond e-unan,
A zo atao en dienez,
Beteg ma teu e dremenvar.

War an daoulin en ho tachenn
Mari, selaouit or pedenn
Mari, selaouit or pedenn.

Eil Diviz

Ar re a oa kent, Keriolet ouspenn.

Keriolet

d'ar beorien.

Hep ! la ! Paotred, piou 'fell dezañ gounid deg skoed

Kontet dezañ diohtu.

(Oll gand spont, pe zouez).

Keriolet

Ezomm am-eus eun den, e izili nerzuz,

Da ziskar ar Hrist-se euz e wezenn euzuz.

Deg skoed n'eo ket a-walh ! mad, ugent a lakaan.

(Mond a ra kuit an eil goude egile).

N'on ket evid gouzañv ar zellou anezañ :

E-kreiz va dizurziou, e krignont va halon

Ha kaer am-eus tehed eh heuillont ahanon,

E-kreiz an noz teñval, am hlaskont heb paouez,

Hag int evel broudou, am gouli didruez :

N'on ket 'vid padoud ken !

Diskarit ar groaz-se,

Hag he sichenn distumm, dieupoh e vo bale.

O ! n'am-eus aon ebed rag barn va zadou-koz,

A zo o relegou er vered o repoz,

Na rag hoh-hini c'hwi !

An Aotrou Garo

Digorit an nor-dal

Ma teuy 'r prosesion euz ar chapel raktal,

D ober tro an dachenn.

Keriolet

Abaoe peur eta
Eo deut ar hiz, amañ da vond da batera
Heb urz war va leve ?
Hep ! an douar a zo
Tro-war-dro d'ar chapel a zo din — « It en dro ! »

An Aotrou Garo

O ! o ! keuderv, c'hoant klask trabas, ho-peus 'm-eus aon,
Hag evid ar wech-mañ ho kavan direzon ;
Ar hiz a zo, meur a gant vloaz 'zo, da dremen
Gand ar prosesion tro-war-dro da dachenn
Ar chapel : Ho mamm vad, morse ne enebas
Ha bremañ p'eo maro, c'hwi deu da glask trabas
Ha tabut heb ezomm.

Keriolet

Komz mad a rit, aotrou,
Mez kaer ho-pezo komz, e chomo va gwiriou
Ganen - ha n'eus na giz, na lezenn hag a virfe
Ouzin, pa girin, da gas diwar va leve
Ar baterien-ze.

An Aotrou Garo

Hag e kredfeh ober
Eun dra ken divalo ?

Keriolet

Hag e kredin, kenderv.
Ya ! ha zoken ma karan, unan bennag da zond
Da glask mired ouzin, e roin trumm e gont
Dezañ : tri meutad en e gov, euz an dir-mañ
Hel lakay da houzoud, piou eo ar mestr amañ.

(O tenna e gleze)
Hep! dizroit diohtu gand ho prosesion
Pe m'ho lazo evel gedon, boued ar hon².

An Aotrou Garo

Nann ! ar Werhez er mêz ! ha gwelet e vezo
Piou a-raog egile da genta a deho

Keriolet

(O weled ar Werhez douget e prosesion).
O ! ar Werhez !

Ar bobl

Turris eburnea, ora pro nobis !

An Aotrou Garo

Honnez n'he-deus kleze ebed.

Keriolet

O ! nag ez on-me foll, hag ouz piou ez on eet
Da glask trabas !

Ar bobl

² ar hon : *(skrivet ar gon er skrid orin)*. Ar chas.

Auxilium christianorum, ora pro nobis.

Keriolet

A-zav !

Ar bobl

Refugium peccatorum, ora pro nobis.

Keriolet

A-zav, it war ho kiz.

An Aotrou Garo

It war a-raog.

Keriolet

D'an aotrou Garo

Truez, kenderv ! eur boan iskiz

Am gwask ! n'eo ket outi eo e klasken gouren.

An Aotrou Garo

A ! Kiza rit ! Hi ho taolo war ho taoulin,

Ma ne girit diwall.

Keriolet

(Gand eun ton peduz)

A-zav !

(Ar prosaion a jom a-zav).

Eur barr enkreuz

Am laka da grena, evel deliou ar gwez ;

He sell a bar warnon, gand kement a zouzder,

Ma teu war va diweuz ar bedennig zister,

Am-eus lakeet beb noz da vond beteg enni,
A dreuz fank va ene : me ho salud Mari.
Ave Maria.

Ar bobl

Ave, Maria !

Keriolet

(D'ar Werhez).

Perag sellad ouzin gand dousder evel-se.
Ha ne welit-hu ket falloni va ene !
Va ene, eun dachenn, he-deus va mamm hadet
Enni, an had kaerra, ha n'int ket diwanet
Dre va faot ! eun dachenn a dlee rei frouez,
Euz ar gwella, ha n'eus enni nemed strouez.
O ! war an dachenn-ze arabad deoh lezel
Ho sellou da bara, en aon, Gwerhez santel
Ne deufeh, c'hwi ker glan, da gizad gand an euz
Dirag va fallentez.
O ! aon ha poan am-eus,
Krena 'ran, gand ar spont, kredi 'ran e kouezan
En eun izlonk divent en e oueled an tan.
O ! Gwerhez, an ifern, ez-veo deu d'am lonka.
O ! emañ maro !
Nann ! c'hwi am buezeka,
Hag ho torn a ziskouez an hent am-eus da heul
Me ar peher fallagr, evid tizoud ar skeul,
A gas d'ar zantelez.
O ! pegoulz e vezo
Glan a-walh va ene, da vond d'an neñv ho pro.

Me hag a zo bet keid o heul hent ar pehed
Va ene a zo louz, saotret ha mil saotret
Eun doñjer e weled ; ha daoust da ze, Mari,
C'hwi deu d'en em ginnig d'am zikour d'her gwalhi. O Burzud !

Ar bobl

O burzud !

Keriolet

Na c'hwi zo mad, Intron,
Ha pegen c'hwek, eo kaoud diganeoh ar pardon
Mez perag diskouez din kement a garantez ?

Ar Werhez

(Eur vouez a deu a-bell).
Dre m'az-peus lavaret, eun Ave din bemdez.

Ar bobl

Ar gounid zo d'ar Werhez.

Ar vugale

Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari (*diou wech*)

Keriolet

Deoh on Gwerhez hiviziken.

Deoh on Mari, korv hag ene.

Deoh e vezin da virviken,

Beteg ar bez ha goude-ze !

An oll

Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari.

Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari.

Ar bobl

Karantez ar Werhez Vari

A zo kreñv, netra n'he zorro.

Kreñvoh eged ar gasoni

Kreñvoh eged falh ar maro !

Keriolet

Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari

(*An oll a-unan gand Keriolet*).

Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari.

Sant Nouga, d'an 28 a viz meurzh 1908.

